

An eztaoladenn vreed

- **Diwar 100 poent eo (800 poent zo er breved)**
- **50 poent 'vo evit an titouroù roet ganeoc'h ha bezañ gouest da arguziñ ha da respont da c'houlennoù ar juri) hag an 50 poent war an doare kinnig (ezteurel dre gomz, live yezh)**
- **Dibabet eo an tem ganeoc'h: pe kinnig KPE bet graet ganeoc'h er c'helc'hiad 4 (5ved, 4re pe 3de) pe kinnig un oberenn arz bet studiet ganeoc'h e-kerzh ar c'helc'hiad 4. (arzoù ar gweled, film, sonerezh, lennegezh...)**
- **Ma tibabit kinnig ho staj micher, n'eo ket ar pal lenn dirak ar juri ho rentañ-kont met kentoc'h displegiñ peseurt gounid 'peus bet eus ar staj.**
- **Gwelloc'h dibab un oberenn arz resis, ne c'heller ket kinnig oberenn un arzour en e bezh e-kerzh un eztaoladenn ken berr.**
- **N'eo ket ar pal ober un diverradenn eus an oberenn, kentoc'h dielfenniñ ha reiñ ho soñj.**
- **Ne vo ket kentelioù evit prientiñ an eztaoladenn, dreist-holl er gêr vo prientet.**
- **Gallout 'rit tremen hoc'h unan pe daou-ha-daou ma kavit unan all laouen da genlabourat war ar memes sujed ha c'hwi.**
- **Hirder an eztaoladenn: 5 mn kinnig ha 10 mn goulennoù gant ar juri pe 10 mn ha 15mn ma tremenit daou-ha-daou.**
- **Un diaporama 'vo savet ganeoc'h (tro-dro 5 diell) evit skeudennaouiñ hoc'h eztaoladenn.**
- **Tremenet 'vo dirak ur juri daou gelenner eus ar skolaj. (D'ar Meurzh 11 a viz miz Even)**

10 reolenn bennañ eztaoladenn ar breved

- Mousc'hoarzhiñ, bezañ seven, diskouez bezañ mennet (zoken ma n'out ket evit gwir !), Startijenn!!
- Distagiñ mat, kaozeal kreñv, komz flour (hep heu..., genre, du coup...)
- Mestroniañ ar c'horf, ar jestroù
- Ezteurel o klask dibegiñ diouzh ar skrid, sellout ouzh ar juri, chom hep treiñ kein
- Frammañ an eztaoladenn (steuñv sklaer kinniget e penn-kentañ an diaporama)
- Merañ mat an amzer (5 mn: berr kenañ eo!). Gallout 'rit padout betek 6 mn d'ar muiañ tout, ket muioc'h!
- Lakaat war e alc'hwez USB an diaporama e stumm PDF ouzhpenn Impress
- Displegiñ mat pep diell diskouezet en diaporama
- Chom hep skriviñ frazennoù war an diaporama
- Goulennoù ar juri: displegiñ mat e soñj: chom hep respont ya pe ket hep arguziñ



Skolaj Diwan Jakez Riou

ARNODENN DRE GOMZ DIPLOM STAD AR BREVED (DNB)

TITOUROÙ A DENN D'AN EMSTRIVER

Anv hag anv-bihan :	Klasad :
---------------------	----------

Titl ar raktres choazet gant an emstriver da ginnig dre gomz :	
Menegit dodenn ar KPE pe an hentad :	
Doare arnodenn (kelc'hiit ho choaz) :	Arnodenn : e-unan / daou-ha-daou : anv an eil emstriver :

Deiziad:	
Sinadur ar skolajiad:	Sinadur ar rener(ez):

Kael briziañ eztaoladenn ar breved

Barregezhioù priziet	Merkoù barregezh	Live				Notenn
		--	-	+	++	
Mestroniañ an ezteuler dre gomz						
Komz dizehan w-d 5 mun. e-unan, 10 mun. daou-ha-daou	Merañ an amzer Talvoudusted ar yezh komzet Lavar fraezh, distag diouzh e notennoù Kinnig gant un diaporama	4	10	16	20	/ 50
Kendivizout w-d 10 mun. e-unan 15 mun. daou-ha-daou	Eskemm komzoù gant tud ar bodad-barn Embann e soñjoù, displegañ, lavaret en ur mod all	3	8	12	15	
Ober gant ur c'heriaoueg rekis	Gerioù azas, resis, puilh	3	8	12	15	
Mestroniañ an danvez						
Perc'hennañ an anaoudegezhioù	Anaoudegezhioù liammet ouzh an danvez pennañ hag an danvezioù all	5	13	20	25	/ 50
Dielfenniñ ha kinnig e vod soñjal dezhañ	Sell lemm, skiant-varn, emouestlañ	5	13	20	25	

NOTENN HOLLEK

/ 100

